



KANTIKOU


Deomp da Goadri !



**Aotrou Krist, ho pet truez ouzomp !
Itron Varia Koadri, pedit evidomp !**

Moullerez A. CÔRCUFF, Kastellin

DEOMP DA GOADRI !



I

KANTIG KOADRI

I
Jezuz, mab an Tad eternel,
Mab Mari dre'r Spered-Santel,
Gret den hag evidomp maro,
Ra viot benniget ato.

DISKAN :

Aotrou Krist benniget
Ni ho karo bepred.

2
It Kristenien, it da Goadri
Da c'houlen pardon, da bedi ;
Deskit abred d'ho pugale
Karet ha servicha Doue

3
Kals tud zo ha n'o deus ket bet,
An heur d'oc'h anaout, d'ho karet ;
Ni zo ganeoc'h eur bopl choazet,
Ha dre ar feiz sclerijennet.

4
Hon tadou koz, tud kalonek,
E kenver Doue anaoudek,
O deus savet chapel Koadry,
Aotrou Krist evit ho meuli.

5
N'eus er vro plas santel kosoc'h
Na dre ar c'harter brudetoc'h ;
A bep tu'teu pardonerien,
Ha tud devot ha pec'herien.

6
Eno'ma feunteun ar grasou
Jezuz-Krist hor Mestr, hon Aotrou ;
He basion hag he vuez
Zo eno peñtet a nevez.

7
Kristenien an amzer gwechall
A zeui ho c'halon da zridal,
Pa welint feiz o bugale
O ficha kaër ar Chapel-ze.

8

Meur a chapel a zo e Skaër
Karet holl gant tud ar c'harter ;
Di ive'zan gant levez,ez,
Da bedi ar zent alies

9

E Koadry ouспен levez,ez,
Em eus glac'har d'am gwal vuhez,
Kroaz Jezuz hag e basion
A lak da ranna va c'halon.

10

War eur menez troet d'an avel,
'Vel ar C'halvar war an uhel
Jezuz eus e Galvar nevez
A c'halv an holl da vont d'e vez.

11

Eun dra burzudus e Koadry
A ra estlam meur a hini,
Eo ar mein-kroaz eno hadet
'Vel eul lec'h gant Jezuz choazet.

12

Pep tra' lavar d'eomp eo Doue,
Mestr an holl draou, krouer an Nenv ;
Ar groaz dreist holl, ar basion,
A die tenerat hor c'halon.

13

Pet gwech, renet gant va mamm gër,
Oun bet o welet va Zalver
Er chapel-ma, hag ar zonch-ze
A zo chomet don em ene.

14

Abaoue ez an di gant joa
D'ar gweneriou da bardon
Da glevet pasion hon Aotrou
Ha da c'hounit induljansou.



II

KANTIG AR BASION

1

Gouelit, ma daoulagad, chetu maro Jezuz !
Maro eo evid-omp, pec'herien gwalleuruz.

Diskan :

Maro Jezuz'vid-omp war beg menez Kalvar,
P'ez kalon ne ranno gant keuz ha gant glac'har,
Gant keuz ha gant glac'har ?

2

Tosta, pec'her, ha deuz ; sell-mat ouz da labour ;
Pep pec'hed ec'h eus gret zo ama torfedour.

3

D'ar Juzevien e vé ? d'ezo n'en tamal ket,
Te'c'h euz roet dorn dezo, te'c'h euz o zikouret.

4

Ec'harz e dreid, deuz'ta da ouela da dechou,
Ha sonj ez int bet kôz demeuz e oll boaniou.

5

Mar deo ruziet e gorf gant ar gwad o redek,
Te a dle e welc'hi gant da zaelou dourek.

6

Evit skuilha daelou, evit touch da galon
N'ec'h euz nemet gwelet poaniou e basion.

7

N'eus nemet eur gouli eus an treid bete'r penn,
Kurunet eo gant spern, plantet bete'n'empenn.

8

E gorf zo dispennet, dihompnet he izili,
E dreid hag e zaouarn treuzet gant tachou kri.

9

Gant ar c'hranch hag ar gwad e zremm zo dislivet,
Ha gant eur c'hoaf gruel e gostez digoret.

10

Pec'her ha pec'herez, te her c'hrucifii c'hoaz,
Ha da galon diwad'zo d'ezan'vel eur groaz.

11

Tud têt, tud buanek, tud bepred venjansus,
C'houi zispenn c'hoaz bemdez e gorf sakr da Jezuz.

12

Danserez ourgouilhuz, na rit nemet bragal,
Hag ar spern dizamant a blantit enn e dal.

13

Gwall deod, teod milliget, dre da gomzou mezuz,
Bemdez e kriez c'hoaz : *krucifii Jezuz !*

14

Den gadal reuzeudik, dre da blijaduriou,
E lakez c'hoaz bemdez korf Jezuz a béziou.

15

Te ro c'hoaz da Jezuz, ô mesvier aheurtet,
Ar vestl hag ar gwin-aigr da derri he zec'hed.

16

Evit ho kervel c'hoaz, e benn a zo stouet,
E galon zo digor, e zivrec'h astennet.

17

Distroït, distroït eta, o kristenien, ouzin,
Hag ho pardon d'eoc'h holl joaüz a aotréinn.

18

Ya, o va Jezuz, ranna ra hor c'halon,
Gant keuz ha gant glac'har e choulennomp pardon.

19

Pardon, va Doue, pardon eus hon holl bec'hejou !
Kentoc'h mervel eget nevezi ho poaniou !

III

KENTELIOU WAR AR GROAZ

War don : *D'hor Mamm Zantez Anna*

Diskan

Kanomp holl, kristenien,
Kanomp a vouez uhel :
Breman ha da viken
Henor d'ar Groaz santel !

1

Bepred e-lec'h ma vo
Dirazan kroaz Jezuz,
Eur christen a gavo
Kenteliou talvoudus.

2

Kroaz an tour

Diwar beg an touriou
Ar Groaz ' lavar dalc' hmat
« Kristenien, d'an Nenvou
Savit ho taoulagad ! »

3

Kroaz an hent

Ar Groaz war an henchou
'Lavar d'an tremener :
« Gwir hent bro an Nenvou
Eo hent Kroaz Hor Zalver. »

4

Kroaz an ti

Dirak holl dud an ti,
Ar Groaz ouz ar voger
A zesk da bep-hini
Derc'hel mat d'e zevel.

5

Deski ' ra d'ar bugel
Beza bepred sentus ;
Senti betek mervel
'Zo bet buhez Jezuz.

6

D'an tadou, d'ar mammou
E lavar Hor Zalvez :
« Beilhit war eneo
Am eus prenet ken ker ! »

7

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour
'Zo ive presius ;
Enni e kav sikour
Da veza gouzanvus.

8

Kroaz ar gador-govez

Kroaz ar gador-govez
A ro keuz d'ar pec'her.
Bet eo ken didruez
E kenver e Zalver

9

Kroaz ar beziou

Ar Groaz war ar beziou
He deuz eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har

10

Kroaz an aod

Ar Groaz, pa ve savet
E kichenik an aod
A ro fizians bepred
D'ar paour kèz martolod

11

Kroaz ar varn ziweza

Pa zeuy, da fin ar bed,
Jezuz evel barner
E Groaz a vo gwelet
O lugerni en èr

12

En eur welet ar Groaz
An dud fall 'a greno ;
An dud vat gant joa vras
Er c'hontrol a drido

13

Grit d'eomp, Salver Jezuz,
Dre verit ho poaniou,
Gant an holl dud eürus
Mont neuze d'an Nenvou

Tad Bourdoulous S. J.

IV

Evit benedikcion ar groaz

O Crux Ave (*teir gwech*)

O Crux Ave, spes unica
(In hac triumphi gloria) (1)
Piis adauge gratiam
Réisque dele crimina

V/ Hoc signum crucis erit in coelum

R/ Cum Dominus ad judicandum venerit

(1) En amzer ar basion e ve kanet : *Hoc Passionis tempore*

OREMUS

Deus, qui unigeniti Filii tui pretioso sanguine, vivificae Crucis vexillum sanctificare voluisti : concede, quaesumus, eos qui ejusdem sanctae Crucis gaudent honore, tua quoque ubique protectione gaudere. Per eundem Dominum.

Eus a vreman bet'ar maro,
Meulomp Jezuz hag e hano ;
Ra vo meulet, e pep amzer ;
Ar Groaz santel eus Hor Zalver.

Dre ho kroaz hag ho pasion,
Roit d'eomp ho penedikcion ;
Ma c'hellimp epad hor buhe,
Ho servicha gant karante.



V

KANTIG D'AN AOTROU-KRIST-ROUE

War don : *Bale Arzul*

Diskan

Enor ha gloar da Vab Doue
N'hon do ken Mestr na ken Roue,
Nemet Jezuz ' pad hor buhe !

1

Galloud an den a zo bihan :
Teuzi a ra, teuzi buan,
Egiz ar c'hoar dirak an tan

2

Galloud Jezuz a jom ato
Krenvoc'h eget ar gwez dero
Trec'h d'an avel a stourm outo.

3

Krenvoc'h eget ar garregenn,
War ôd ar mor difinv he fenn,
O c'hoarzin goap d'an tarziou gwenn.

4

Pelec'h emaint ar rouaned
A oa gwechall kement brudet ?
— Emaint pell-zo ' barz ar vered

5

Pelec'h eman o c'hurunenn ?
Ne lugern naui endro d'o fenn
— Torret eo bet ' vel eur blouzenn,

6

Jezuz hepken ' zo eur Roue
Ha no gollo e dron morse ;
Ni a zo sur a gement-se.

7

Jezuz a dle beza Roue
Pegwir en deus *Den-ha-Doue*,
Mestr e pep lec'h, e pep mare.

8

Roue an holl e tle beza,
Pegwir en deus, ' vit o frena.
Skuilhet e wad, hep marc'hata.

9

Kalz tud difeiz o deus kredet
Ober d'ezan brezel kalet :
'Giz deliou sec'h int bet skubet !

10

Hag ar re fall a zo breman,
Evel chas-yud o stourm outan,
A vo d'o zro brevet gantan.

11

Laret en deus : Roue me ' zo !
Roue bepred me a vezo,
Ha den ebet n'am diskaro !

12

Me rene dec'h ; me ' ren hirio ;
Warc'hoaz ive me a reno
Ha da viken me a drec'ho.

13

Poblou ar bed, eus a bep gouenn,
Melen pe ruz ha du pe wenn,
A dle senti ouz e lezenn

14

Ar re zonzus ' vo digollet,
Ar re zireiz ' vo kastizet :
Jezuz-Roue ' za lealded.

15

Jezuz dreist-holl ' zo madelez :
Trec'hi a ra dre ' r garantez ;
Beva gantan ' zo levez.

16

Trec'het en deus, war koad ar Groaz ;
War an Aoter, trec'hi ' ra c'hoaz ;
Roue ker mat n'eus bet biskoaz

17

Dindan e stur an dud gwella,
Ar c'halonou ar santela,
'Va mall hanto en em voda.

18

Na laromp ket ' vel ar Yuzeo :
(Ne fell ket d'eomp dougen e yeo !)
Trei kein d'ezan na spontus eo !

19

Diskenn a rei da fin ar bed,
Leun a c'halloud ha leun a sked,
Da varn an holl, 'giz ma vo red.

20

Neuze dreist-holl, ha ' vit ato
Jezuz-Roue a c'hounezo :
Tôlomp evez, pe ni ' lenvo !...

21

Karomp ervat Jezuz-Doue ;
Karomp ervat Jezuz-Roue,
Ha ni ' reno gantan en Nenv !

B.

VI

KANTIG EN ENOR D'AR ZAKRAMANT ⁽¹⁾

War an ton gallek : *O l'auguste Sacrement.*

DISKAN :

*O Sakramant burzuduz,
Lec'h omp magel gant Jezus.
Ennan ema Hor Zalver ; }
Kredi a ran war e c'her. } bis*

Jezuz, d'an noz kent mervel,
'Ro galloud d'e Ebestel
Da jench ar bara, ar gwin
'N e gorf hag e c'hoad divin.

Ar veleien, d'ar gorreou,
A gonsakr gant e gomzou,
Ha Jezuz, mestr bras ar bed,
Ouz o mouez a zent bepred.

Hep kuitât e varadoz,
E chom aman deiz ha noz ;
Chom a ra en hon touez
Dalc'hel gant e garantez.

Eus ar gwin hag ar bara
Petra jom ? Ne jom ken tra
Nemet ar spesou dister
A guz korf, goad Hor Zalver.

Aman n'hellomp ket kompren ;
Ar feiz hebken hor c'helen...
Gant ar feiz sklerijennet,
Ne fazi ket hor spered...

E doare ar sperejou
Eo'n em laket en hostiou.
Pa vez an hostiou torret,
E gorf sakr n'eo ket rannet.

Neb ya d'ar gomunion
Gant ar pec'hed'n e galon
A gemer skouer war Judas,
Hag a ra eun torfed bras.

Mes, pa vez, aròk tostât,
Ar goustians et stad vat,
Unanet gant Hor Zalver
Gwir eusted a gaver.

Meulomp, karomp, adoromp
Eun Doue ker mat ouzomp.
Ret eo sonjal dreist pep tra
En e zonezon gaera.

Jezuz eo ar Roue bras ;
Adorit-hen war e groaz,
Hag en Nenv, hag e mester
Sakramant sakr an Aoter.

Tad BOURDOULOUS.

(1) Grêt war batrom, eur c'hantig gallek bet savet gant an Den eürus Grignon Monfort.

AN DEVOSION DA GOADRI

Ar pardon bras a vez da zul ar Zakramant. - 2 oferenn, 7 h. hag 11 h., Gousperou da 2 h. 1/2.

Pardon ar Groaz : d'ar pevare sul a viz Guengolo. - 2 oferenn 7 h. 1/2 hag 11 h., Gousperou da 2 h. 1/2.

Pardon Kalagoanv : d'ar zul goude an Holl-Zent. - oferenn da 8 h.

Pardon an A Trou-Christ-Roue, d'ar zul diweza a viz Ere. - 2 oferenn 8 h. ha 11 h., Gousperou da 2 h. 1/2.

D'ar gwener kenta a bep miz : oferenn da 8 h. 1/2.

D'ar gweneriou epad ar c'horatiz : oferenn da 9 h.

Ar Basion a ve diskleriet e Koadri d'an Yaou-Amblid da 2 h. ha da Wener ar Groaz da 8 h.

Indulgansou bras a zo staget ouz ar chapel gant Hon Tad Santel ar Pab Pie VIII^{te}.

*
*
*

Aotrou Krist, ho pet truez ouzomp !
Itron Varia Koadri, pedit evidomp !

Kemper, 5 a viz c'honevrer 1932

Imprimatur

P. MESSENGER, Vikel-vras.